

BIEDER VESTRES

Var un ton neve.

D'an neb a zo bet ganet en eur blaneden galet,
 Oll o demarchou guella zo demarchou collet;
 Ha c'hoas mar deu dre chanc cavet tam plijadur,
 Dre eun nombr a zisgraçon ho péo gant uzur.
 Evit prouvi va dessin, na ranqin qet furchal
 Archivou ar baros-mâ n'hac ar barosiou all
 Na meus nemert teurl eur zel varnon-me va unan,
 Ha demeus ar virione me a rei prouy hep poan.
 Eun detail seler ha sincer demeus ar maleuriou
 A zo erruet ganin en eals eus a vroyou,
 A zisqo da heb-unan, hac a brouvo certain
 Peguen trist eo an etat eus ar goall blaneden.
 E zan eta da gommanç an etat truezus
 Demeus va chanch dinatur, va bue maleurus :
 Selaonit ta, tud yaouanq, ha mar queret dioual,
 Marteze c'houi brofite a valeuriou re all,
 Diwallit eus an amour, ennes ar penn qenta
 Demeus an oll disgraçon a meus bet er bed-mâ;
 Poan memes ra din sonjal en anqen diremet
 A meus bed var an douar o vesa re garet.
 Peder Vestres a meus bet : unan en Ameriq,
 Ha diou ebars en Europ, hac eun all en Afriq;
 Ar guenta voa hanvet Catou, an eil Genovefa,
 An deirvet voa Pelaji, ar bedervet Anna.
 Ne voan nemet pemzec vloas pa gommancis qenta
 Mont da velet Cataouic ha d'e zarempreda;
 Ma carien, e voan caret, a guement se voan sur,
 Nonobstant d'hon amitie, n'hor boa tam plijadur.
 Ma aboster am dalc'he, dre ma voan re yaouanq;
 N'ellen na comz, na qerzet nonobstant d'am oll c'hoant
 N'eur memes stat e veve an objet a garien,
 Hon huanadou a ré hon oll antretien.
 Nao pe zec mis e voan bed en hevelep poaniou,
 Ha c'hoas e vijen chomet, daoest d'am zourmanchou,
 Peneverd ma animas qerent va mestrez qer,
 Hac a zifennas outi caouet comerç gant gloer.
 Nonobstant d'o difennou, ni n'eur gave bepret
 En eur plaç hor boa chozët evit en em velet;
 Mes qer e voc d'ar plac'h-mâ cavet fidelite,
 Dre ma vije maltretet er guër pa errue.
 Bonjour ha joa, ma mestrez, hirie penos a ret?
 Petra oc'h eus a neve? meurbet oc'h contristet!
 Possubl e ve ho qerent a ve qen dinatur
 Da exerc en hoc'h enep o maliç dreist musur!
 Ia sur, va zervicher, me a eprouvas dec'h
 Ar valiç demeus va zad, an nerz demeus e vrec'h,
 Hoguen evit quementse ne roan caz ebet,
 Pa meus gallet sortial, e zon deuz d'ho quelet.
 Hoc'h amitie ho fidel, me zo charmet dreizi,
 Me vije eun plijadur ma vijemp hep anvi;
 Mes qeit ha ma valein var bave Landreguer,
 N'hor bezo evit partach nemet poan ha mizer.
 Hi, p'am c'hévas, a laras evit va c'honsolin :
 Remuomp ar resortchou demeus hon industri;
 Marteze dre hon adres ni a deuyo a ben
 Da appesi o c'holer ha d'ho distrei a grenn.
 Hi a eure he fossubl, me a eure va hini;
 Nonobstant d'hon effortjou, ze gresque hon anvi:
 Neuze e velis certain ne voa demp nep moyen
 Da souten ar groas pouner pini'r boa da zouguen.

Neuze ta e ris ive va effort diveza,
 Ha ma sonjis evoa ret en em dispartia;
 Hoguen, qen evit quitaat e zis da velet Catou,
 Da gonta dei va doare ebars en bér gomzou.
 Na hortois nep respont a c'henou va mestrez,
 Me a guitaas anezi leun a dristidiguez;
 An deiz varlerc'h e ris hent evit mont da Paris,
 Elec'h ma chomis yadro eur seiz pe eun eiz mis.
 Ne voa netra er guër-se, daoust d'e oll fompou,
 A guement a zisipe en nep guis va c'hanyou;
 Ar zonch afflijant demeus ar pez am boa collet
 Na hermete d'am speret cavet tam joanistet.
 Me receive lizeriou eus ar re douchanta,
 Hac a ré d'am c'houlion a neve dioada;
 Erfin quement a receive demeus a nec'hamant,
 Ma sonjis mont d'eur plaç all da glasq soulajamant.
 An effet a heuill va sonch, ma quitaas va studi,
 Ha me monet d'ar Rochel vit en em ambarqti,
 Ha me monet d'ar c'holoni, da zouar Canada;
 Elec'h ma ris ar rancontr eus a Genovefa.
 Honnes voa ar charmanta demeus an oll merc'het
 A guement am boa biscoas var ar bed-man guelet;
 C'hoas e remerquen enni modesti ha prudanq,
 Eun antretien charmant ha calz eus a chevanç.
 Evit petra benaquet, nan don qet hep doueti
 Ne zeus den var an douar a guement zo hep si;
 Mes ne allan qet credi e vije em mestrez
 Nemet perfectionnou ha pep seurt madelez.
 Mes allas, dallidiguez eus ar speret humen!
 Me na velen qet cuzet dindan ar roz ar spero;
 Me na ellen qet guélet dindan croc'hen an noan,
 An natur hac ar valiç demeus an ærouan.
 Me a voe pell amaret gant al laçon trompus
 Scoulmet gant dorn miliguet an draitourez Venus.
 Me voe pell er servitud; an amzer gouscoude
 A uzas va chadennou, m'am boe va liberte.
 Sortiet a esclavach, torret va chadennou,
 Va oll occupation voa cassat va joayou;
 Mes eus en em re fiout, eur pec'h all am sias,
 A voa cren e ressortjou; ennes c'hoas an dallas.
 Na receiveis nep gouli na reje din anqen,
 Ha mar hoan dalc'het captif, va etat a garien;
 Dindan ampir Pelaji, rouanes va c'halon,
 Me receive eur joa vras ha satisfaction.
 Qement am anezeze a lavare hep mar :
 Ema eo chansussa den a zo var an douar,
 Dre ma plich da Belaji, fleuren an oll merc'het,
 Eun exempl a vodesi, gant an oll admiret.
 Me va-unan a sonje penos en devoa grét
 Ar rod a fortun eun dro benaquet em andret;
 Mes depordit eun nebeut qen coll paciantet,
 Hac e cléfet e voamp et pella m'el Kemp monet.
 Fixet voc guenemp an deiz evit accomplissa
 Ar bromesse hor boa grét vit en em unissa;
 Mes me yas da chasseal eun devez deur sprest,
 Elec'h ma erruas ganen eun accidant funest.
 Me racontras dec sovach, tud a re euzussa,
 Hac en eur stringjont varnon en axis va laza;
 Mes Doue oll-buissant mad en andret an oll,
 Deus o daouarn redoutabl a arretas an tol.

Va liberte gouscoude diganen a lamjont,
Hac en guiz eur c'hriminal da Vro-Zauz em c'hesjont
Adieu eta, va mestrez, adieu d'am Pelaji:
Pa ne varvis, birvigen ne varvan vit anvi.

Me laqa fin d'am histor en sort occasion,
A poaniou em speret ha chagrin d'am c'halon;
Mes c'hoas e teu din-me zonzh deus va douciq Anna
A b'ini e comzin deoc'h quent eguet finissa.

Madou, guenet ha famill, humilite, chevanc,
A beb amzer anezo e devoa abondanc;
Daoust d'am indignite, bremâ ez'euz tri bloa
Deus e amitie em boe ar bortion guella.

Ebatal rejomp hon daou ha plijadur hor boe
Epad eur bloa pe ouspen, hervez hor volonte;
Mes an drouc chanch ordinal eus va heuil pas a pas,
Daoust d'hor fidelite, allas! hor separas.

Cetu aze, va breudeur, un darn eus va bue,
Circonstançou a lezân hep comz eus aneze:

Avoalc'h e meus lavaret evit rei da breuven
Er pez a meus anoncet e penn va c'hanouen.

Guir eo, simpliciteou eo certen qement-mâ,
Me a glefe cavet mez da zont do recita:
C'hoarzit eta, mar qeret, ne vo qet hep justiq;
Mes dioualit da goea er memes precipiq

C'houi dreist peb tra, gloer yaouanq, m'ho ped da evessât,
Goude c'hoarzin re abret, n'ho pez qun divezat:
N'ho pezet quet gand merc'het euep seurt migouaiach
Qeit a ma voc'h o poursu ho studi er scolach.

C'houi a occup ar plaçou a meus bet occupet,
Sujet d'an occasion o deveus va dallet:
Lest ar merc'het a goste, tachit d'en em avanc,
Pedit Doue d'ho sicour, hac o pezo gûel chang.

Pedit Doue d'ho sicour, hac ho peze, hep mar,
Poneur ebars er bed-mâ, hac er bed-all ar gloar;
Ha pa vezoc'h o pedi, ma zellet gant true,
Me a esper cavet c'hoas chanch ha prosperite.

MEULEUDI ITRON VARIA BREIZ.

Kan 29 euz tonio Dom Herry.

Tud bro Treger, kânerien gaer;
Tud a Gerne, gwisket ken kaer;
Breiziz Leon, flour ho prezek;
Potred Alre, tud kalonek.

Potred Breiz-Izel, ma zud vad;
Tom a galon ha skanv a droad;
D'in leveret, d'in leveret,
Pelec'h oc'h bet, na pelec'h et?

Mont a reomp da bardonia;
Da di ann Itron Varia;
Da bidiz mam ar Vretonned,
Brasan Santez a zo er bed.
Me micherour, me labourer,
Me zo soudard, me devejer,
Me zo mevel, me zo mitez;
Ni ia da welet ar Werc'hez.

Me oa, boa seiz vloa, pistijet,
Gand ann drouk pen hep peuc'h-ebet;
Ed eo kuit ma drouk pen breman:
Mil bennoz da vamm ann dud klan!

Me am boa poan ha melkoni,
(Aliez, siouas! hon eus-ni!)
Gant-hi on bet diboaniet,
Ha mont a ran d'he darempret.

Me am boa klan ma holl loened,
Pa bidiz mam Doue ganed,
Ganed entre daou aneval;
Hag hi zo deut da vad raktal.

Me oa enn eul lestr o veui,
Pa n'emm westliz da vont d'he zi:
Ar Werc'hez e deuz ma c'hlevet;
Me ia breman d'he darempret.

M'em boa mainn war he gwele,
He dorn em dorn me a vele;
Me gan breman, deut eo da va vat.
Gwerc'hez Vari, trugarekat!

M'em boa ma mab enn he gavel,
Hag hen ien, o vont da vervel;
D'ar Werc'hez he westliz timad;
Ha breman ema iac'h avad.

Me a oa miud hag e komzan;
Me oa bouzar hag e klevan;

Me a oa dall, ha me a wel;
Mil bennoz d'ar Werc'hez santel.
Me oa en Aljer er brezel,
Pell, siouas! euz a Vreiz-Izel;
Ha me d'ann douar diskaret,
Gand eun tenn kanon em boa bet.

Ha me sellet ouz an envo,
O skuilla goad a boulado;
Ha me gervel mamm ar Zalver;
D'ac'h en em westlan, mamm dener.

Oa ket ma c'homz peur-lavaret,
Ar Werc'hez a zo dizkennet,
Ha gand he daouarn binniget,
Ma goullo e deuz serret.

Pa'z on distroet war ma c'hiz,
Gwerc'hez, me rai tro hoc'h iliz,
Diarc'hen koulz ha diskabel,
En roched goadeg a vrezel.

Oh! n'eo ket gaou a lavaraz
Ann tado zantel a skrivaz:
« Biskoas den n'en deuz ho pedet,
» Gwerc'hez, hep bea chelaouet. »

Chelaouet c'hoaz ar Vretoned,
D'ar mare ma vezint baroed;
Pedet neuze c'hoas evidomp;
E c'harz ho treid her goulennomp.

Leret da Jezuz: « ma mab kez,
Am euz me maget gand ma lez,
Dre ar c'hoy en deuz ho touguet
Digoret deze, me o ped. »

Tud a Vreiz-Izel int, tud paour,
Tud vad, brewet gand al labour;
Tud a dirre gand ann aler
Ann douar cri e peb anizer.

Tre-walc'h, tre-walc'h ho deuz c'houezet;
Poanio tre-walc'h ho deuz-hi bet;
Tre-walc'h ho deuz skuillet daero;
Roet d'he peurz enn ho joajo. »

Neuze tei Doue da respont:
« Dont er Baradoz ec'h hellont;
» Karet a ran ar Vretoned,
» Pa garont ma mam yinniget. »